

848 A
la signature de S. S. S.



KLOAREK KOAT AR RANNOU

HA

PENN-HEREZ KERZANTON

Var ton : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia Remengol*
pe var ton : *Kloarek Remengol,*

Karantez ha glac'hard !!!

I

Tud yaouank a Vreiz-Izel, didostait da glevet
Ar recit eus va daélou ha va foanion kalet :
Me so eur c'hloarek iaouank a eskopti Kemper
Am boa choazet eur vestrez eon eskopti Treguer.

E c'harz ar mor ouñ ganet en bro sant Gwenole,
Ha biskoas nemet glac'har n'em euz bet em bue :
Glac'har ha guir garantez, setu va flaneden,
Planeden rust ha kalet da heulia pen-da-ben.

Pa oan em bugaleach va mam baour aliez
A lavare din : « Va mab, kar ha ped ar Werc'hez,
» Ped anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
» Mar he fedez a galon, biken ne di da goll. »

Patronez va mam dener, Gwerc'hez vad Remengol,
Pet gweach oc'h euz-hu miret na dounn me eat da goll!...
Ho pedet am euz bepret... breman arok mervel,
E kanian ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II

Pa gimiadiz dioc'h va zud, pa ziz pel eus ar ger,
Evit mont var ar studi e skolach Landreguer,
N'em boa nemet pemzek vloaz, me a wele dourek,
Rag evidon ne oa ken, allaz, a eurustet.



O tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik,
Koant vel eun ælik Doue, he hano oa Metik,
D'ar gouent e zea ive, evel d'on d'ar studi,
He c'halonik oa mantret kement ha va hini.

« Salud deoc'h, plac'hik iaouank, a lavariz dez-hi,
» Evel d'oun oc'h ankenet o kuitat tud ho ti;
» Ho tornik flour em dornik lakit gant karantez,
» Hag e vezimp eurussoc'h o wela assemblez. »

Ar plac'hik a lavaraz : O kloarek Gwenole,
» Pedomp Doue aliez an eil 'vit eñguile;
» Er jôa koutz hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik,
» Euz a vremau da viquen e vo ho mestrezik. »

« O Metik, va c'harante, rozen gaër Breiz-Izel !
» Var ho mignon Gwenole tolit breman eur zell,
» Eur zell digant ho lagad a raï va eurustet
» Keit a ma lezo Doue ahanon var ar bed. »

Erru e kear Landreguer, erru e penn hon hent,
Me oe kaset d'ar skolach, ha Metik d'ar gouent ;
Ann dispartï oe kalet, c'huero hag ankenuz ;
Ann eurustet, er bed mau siouas ! n'eo ket padus !...

Tre ma chomiz er skolach, skenden dous Metik kez
Eun deiz, en noz dirazon a deue aliez,
Neuze e peden Doue ha Sænt koz Breiz-Izel
'Vit ma vije he bue laouen, eurus, santel.

III.

Pa oe achu va studi ez iz da Remengol
Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad *Remed-oll* ;
Seiz tro a riz d'an aoter, devez ar pardon braz
Ha seiz tro d'an Iliz sakr var benn va daoulin noaz.

Goude an oferen bred, ô pebeus levenez !...
Er vered gant he mamm ger, e velis Metik kez :
Laouen oa evel an deiz ha coant evel al loar,
Biskoaz pen-heréz ker koant n'euz bet var an douar.

Luguerni a re he zal, he diou chod gwen ha ru,
He ginou, vel eur rosen, he bleo, he lagad du,

Eur groaz aour en e c'herc'hen, he c'hoef dantelezet,
Lavaret 'vije eun æl euz an ên diskennet.

- « O! pebeus joa evidomp, va c'hloarek Gwenole,
- » En em gaout en Remengol, de pardon Mamm Doue,
- » Mamm an oll dud ænkeniet, Gwenole, ma mignon,
- » Evidout, e peb amzer, he fediz a galon.
- » Metik koant, setu aman, setu ar voalen aour
- » A roaz d'in, arog mervel, Annaik, va mamm baour,
- » Doug anez-hi var da viz, kemer-hi digan-en,
- » Me dou var goalen va mamm d'az karet da viken.
- » Ar groaz aour zo em c'herc'hen a vo did, Gwenole,
- » Eur guchen euz va bleo du a roan did ive;
- » Var ar groaz se e touan ha dirag ar Werc'hez
- » E vi karet gant Metik 'tre ma vo e buez. »

Ha daoulinet en Iliz, hon euz gred hor peden,
Ha roet evit offrans, eur c'houriz koar melen,
Binniguet hor medalen, poket d'ar relegou,
Da relegou sænt Breiz, karet gant hon tadou.

Goude hon eus baleet hon daou die Vreiz-lzel,
Ha gwelet kals 'ilizon, kals a dourion huel,
Abbaty Landevennek ha mor Douarnenez,
Lec'h ma oe beuzet kear Is hag ar brinces Ahez.

Gwelet hon deus Mene-Hom, hag ilis veur Kemper,
Mene-Bre, ilis Butat hag hini Landreguer,
Kastel Brest, Sant Ian-ar-bis, ilis Salaün ar foll,
Ha kaëra tour so er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Kerahez, Kemperle, Pont-n'Abad,
Fouenan, bro ar merc'hed koant, Gwengamp hag fiuelgoad
Moutroulez ha Lann-Huon, Krozon ha Lez-n-even,
Kallak, bro ar gourinou, Kastel-Iin, Rosporden.

Klevet on euz o krozal ar mor e beg ar Raz,
Biskoaz den n'hen tremenas eb santout aon pe c'hlaz,
Bet omp en enez Sizun, en Heussa, Molenez,
En enez Vaz, er leodet, ive er seiz enez.

Eur bloavez omp bet eurus evel daou æl Doue,
En pep lec'h, pa hor gullet, an holl a lavare :
« Setu kloarek ar Rannou, soun evel eun derven,
» Setu Metik, he vestrez, fresk evel eur rozen. »

IV

Devez pardon sant Herbot, e kleviz eur c'helou
En euz beuzet va c'halon, en eur mor a zaëlou,
Gant he zad ha gant he mamm d'am mestrezik Metik
Ez oa choazet da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan ze oa diot, hep furnez hep skiant,
Ne gare var an dour nemet ar gwin-ardaot,
Metik paour pa er gwele a grene gant enkrez,
Hogen, he zud ioa dallet, allas ! gant an danvez!...

Mont a riz primin d'he gwelet neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen em c'breiz, e krene va c'halon,
Var dachen ar bourg o sou e oa ar biniou,
Tud an eured ha Metik beuzet en e daëlou.

Metik, a dreuz he daëlou, a reaz ouz-in eur sel
En eur lavaret : « *Kouraj, Kouraj, mignon fidel!*
Monet a ra en ilis, lavart 'ra d'ar belek :
« *Gwenole eo a garan, hag hen vo va fried!*... »

Koueza reaz d'an douar, raktal ar benn-berrez,
Ha douget e oe dioc'h-tu euz an ilis er mez ;
Dispak he c'hoef, he dillat, ha dispak he bleo ;
Seblantout a re beza eun ælik paour maro.

Mantret oll gant ar glac'har e koueziz d'an daoulin,
En eur grial : O Metik, sell a druez ouzin !...
Pokat a riz d'he dornik, d'he diou chod, d'he c'herc'hen ;
O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien!...

An dizesper en dro din, evel eur vantel blom,
A gassaz pell a c'hanon, pell var zu Mene-Hom...
Va skiant a so kollet, va c'halon a so ieu...
O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien!...

Eiz de goude, asezet e kreiz koat ar Rannou,
Var va diou chod e rede diou feunteun a zaëlou...

Pa glevis e Remengol o son an anter-noz
E lavariz esklamet : « Va doue, deoc'h bennos !

- O Gwerc'hez sakr Remengol, sellit oc'h va glac'har,
- Aman oun deut da vervel brema var ho touar,
- Varc'hoaz pa zavo ann heol arc'hantel eo envo
- Dindan an derven goz ma, me vo kavet maro!!!...
- O Metik, va dousik koant, te p'hini a garien,
- Kenavo lavaran did er bed ma da viken!
- Gant ar maro unanet, ni c'hoaz eu eum garo,
- Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo!!!...

V

An de varlerc'h, da zao heol, eun durzunel hep par
A hirvoude en derven he c'hlemou a c'hlac'har;
Ar c'hloarek a ioa maro, ma o gant an anken,
En eur lavaret : « Metik te p'hini a garien!

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas var he vuzellou,
Kroas aour ha bleo du Metik, glebiet gant he zaëlou;
Var an derven 'n'doa skrivet hano he garante,
Ha diou galon unanet, treuzet gant eur c'hleze.

Kasset eo bet ar c'hloarek da vered Remengol,
Ha sebeliet e disheol ilis sakr Remed-oll,
Iliz Patronez he vamm en deoz bet ken karet!...
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit 'vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en he vele douar!!!...
Eur miz goude oe klevet huanadou glac'h r...
Eur plac'hic gwisket en du, e bered Remengol
Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed-holl.

O tremen dre ar vered, velaz var eur men be
Skrivet neve flam hano he mignon Gwenole.
Epad an noz daoulinet, Metik wele dourek,
Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek.

- O Gwenole, eme-z-y, setu te o repoz
- E douar sakr Remengol ez out deut d'am gortoz,

- » Mæs kent ma tarzo ann de, o va muia karet,
- » Er be man, dre zorn Doue, n'hi vezo unanet!!!...

Da zao-heol eur belek koz, 'voat da bedi Doue
He c'havaz anter-varo, gourveet var ar men-be,
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolveu ha pardon,
Metik a varvaz laouen, raktal, gant rann-galon !...

Enn eur vogeden ezanz ene glân Metik kez,
'Vel eur goulmik, a nijaz d'ann ên gant ann elez ;
Euz a varadoz Doue eur gwoabren arc'hantet,
Var tour Iliz Remengol, neuze, zo diskenet.

Var ar gwoabren ar Verc'hez ha sænt koz Breiz-Izel,
'Deus kurunet Gwenole hag he vestrez santel,
Barzet ann amzer zo bet, drant, var ho zelennou
Da Zoue, en brezounek, a gaue ho gwersiou.

Sebeliet e korf Metik, kichen korf Gwenole,
Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant egile...
Eur c'hloarek karantezuz 'n deuz var ho be skrivet
Ar c'homzou truezuz man, gant he zaëlou mesket :

- « Aman e repoz, e peoc'h, kloarek koat ar Rannou
- » Den a feiz hag a galon, den a garie he vro ;
- » En e gichen eo kousket penn-heres Kerzanton,
- » Metik, an ælik Doue, maro gant rann-galon !!!... »

O gwerc'hez vad Remengol, setu ho taou vuguel
Kousket e tal hoc'h Iliz ha diadan hoc'h askel,
'Vel eur Vamm garantezus var gavel he mabik,
C'hui dolo evez var be Gwenole ha Metik!!!...

Kleier, ograou Remengol, truezuz c'hui zono,
Barzet ha pelerinet, daëlou c'hui a skuillo,
Var be Metik, Gwenole, pa rafet ho peden,
Eur beden a garante ha karget a anken !...

Bevit e doujanz Doue, tud iaouank Breiz-Izel,
Pedit Gwerc'hez Remengol evit ma viot santel ;
Sonjit ive en Metik, sonjit en Gwenole,
Bezit evel d'ho fidel ann eil d'eguite.

AN HINI A GARAN

Var eun ton neve.

An hini a garan 'zo koant evel an heol,
Karantezoz evel Gwerc'hez vad Remengol.

Done sent Breiz-Izel, Done va zadou koz,
D'an hini a garan roit bepzet ho pennoz.

An hini a garan 'zo dous evel al loar,
En noz pa sklerijen bugale an douar.

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan 'zo vel an alc'houeder
D'am c'halon paour e kan sonion, gwersiou tener,

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan a zo dous he hano,
Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio.

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan 'zo eun ælik Done,
Eun ælik dous a ra joaustet va bue.

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan 'zo 'vel an durzunel,
Pa ve maro he far, enem doll da vervel,

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan em c'halon a chomo,
'Tre ma vin e bue, ha goude va maro.

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan gane-me en disheol,
A repose eun de e bered Remengol.

Done sent Breiz-Izel, etc.

An hini a garan e palès an Drindet,
Gane-me da vijen a vo karet, karet.

Done sent Breiz-Izel, Done va zadou coz,
D'an hini a garan roit bepzet ho pennoz.

LARRUON, ena ty Ar Goffic, imprimer. ha teurer.



Koat ar Rannou, (Rann, Rannou, chants, séries), *bots des chants ou des séries*. Koat bras en dero, a zo en kichen, ha dar zao heol da ilis Remengol. Ann Drouizet, beleien ar Vretonnet, gwechal c'hoas difeiz, a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eur louzaouen, hanvet *huel-var*, p'hini a zao var ann dero.

Barz, barzet, (barde, poëte). Bep bloaz ive enem gave e koat ar Rannou hac e *Rumengoulou*. hirio hanvet Remengol; Barzet ann Arvor. Ar re ma a oa tud a skiant pere a gane gwersiou gret gant ho, var ann traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meuleudi Teutatès. Done faoz, p'hini a oa enoret el leac'h e ma brema iliz Remengol. D'an hini vije hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, var p'hini ar Barz a gane he sonioh.

Gwenktan, Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent m'a teuz en-hi ar feiz kristen. — Brema zo c'hoas e Breiz kalz Barzet, pere lakà ho studi hag ho fean evit kenderc'hel en hon touez ar feiz ha jez hor bro. E pen kenta eus ar barzet e m'a an aoutronez Kermarker, barz Breiz; Troude; Karis, person Plougras, barz Méné-Bré; Kemar, person ha barz sant Laurans; ar Skour, barz Itron Varia Remengol; Milin, barz Laouenan Breiz; Rannou, barz Roch al Laz; Olier Souvestre, barz Méné-Ilom; ann abad Herri, barz ann Aviel; Keinneq, person ha barz ar Ponthou; ar Iann, barz Koat ann Noz; Poullaouek, cure Landevennek, barz sant Gwenole, ha kalz a re all, pere o deuz gret eun niver bras a werzioh ha sonioh kaer.

- « Kanit anez ho, Breiziz, rag beza int gwerzioh »
- » Gret gant skiant ha kalon ha gant gwel vad komzou.
- » Gret int e brezounek mad, nan e koz vrezounek,
- » Evel ar re zo kalz re e brezounek-gallek. »

Barzet ha pelerinet, kanit gwerzioh santel,
Kanit gloar ha meuleudi da van, tud Breiz-Izel,
Ho Mam hag ho Patrones, Rouanes ar bed oll,
Mam ann dud paour ankeniet, *Gwerc'hez vad Remengol*.

